

# NAVED AR C'HRAS

ENN ENOR

## Da Zant Fransez Xavier

(ETRE AR 4 HAG ANN 12 A VIZ MEURS)

E lin ar bloavez 1633, eun Tad euz a Gompagnunez Jezuz, ann Tad Mastrilli, a oe goall-c'hlazet gant eur morzol, kouezet var he benn euz eun hue!der a ouspenn kant troatad. N'en devoa nemed ar maro da c'bedal, pa oe paret enn eun taol gant sant Fransez Xavier, da behini e ou bet devot braz adalek he iaouankiz.

Ar zant braz ze en em ziskouezaz he-unan d'ezhan e kear Napl, ha goude beza hen aliet da vont d'ar Japon, evit gounit eno kurunenn ar verzerenti, a ziskleriaz d'ezhan eun dra hag a c'hell beza talvoudek braz d'ann holl gristenien, d'e-omp-ni, dreist-holl, Bretoued, guella mignouned sant Fransez abalamour ma karomp kement Breuriez ar Feiz :

Hiviziken, eme ar Zant, kement den a gendalc'ho d'en em erbedi ouz-in epad nao dervez, etre ar 4 hag ann 12 a viz meurs, deiz mar ez oun bet diskleriet sant, en devezo digant Doue kement tra e c'houlennno evit he zildivigez hag evit gloar Doue gant ma kovesaio hag e kommunio, ouspenn, epad ann naved.

Ann naved goulennet evel-se gant sant Fransez Xavier a zo bet great abaoe e meur a leac'h, ha kement a c'hrasou a zo bet gounezet dre-z-hi, m'eo bet hanvet *Naved ar C'hras*.

Setu aman ar bedenn a lavare, evit ann naved-ze, ann Tad Mastrilli : hi eo ar guella a oufemp lavaret hon-unan.

## Pedenn da Zant Fransez Xavier

Sant Fransez Xavier, sant leun a vadelez hag a garantez, me a zeu da zaoulina dirak Doue evit Hen adori gant doujans, d'hoc'h hent hag a-unan gan e-hoc'h. He drugarekaat a ran, a greiz kaloun, euz ar c'hrasou dispar E roaz d'e-hoc'h epad ho puez, hag euz ann eurusted En deuz roet d'e-hoc'h goude ho maro. Me ho ped hag hoc'h asped, o sant Fransez, dre ho pedennou nerzuz, obtenit d'in digant Doue ar c'hras kaer da veva ha da vervel evel eur zant.

Me ho ped, ouspenn, da c'houlenn d'in ar c'hras — (*hauvit aman ar c'hras hoc'h euz c'hoant da gaout*). — Koulskoude, mar ez eo kement-se kontrol da c'hloar Doue pe da vrasa vad va ene, ra vezo roet d'in ar pezh a vezo ar guella evit ann eli dra hag egile.

3. Bater — 3. Ave — 10. Gloria Patri

### PEDOMP

Va Doue, plijet eo bet gan-e-hoc'h getver d'hoc'h Iliz poblou ann Indez dre brezegennou ha miraklou sant Fransez Xavier. Roit d'e-omp ar c'hras da heulia vertuziou ar zant-ma, evel ma rentomp meuteudi d'he veritou ha d'he c'hloar. Dre Hor Zalver Jezuz-Krist.

Evel-se bezet great!

### IMPRIMATUR :

A. GADON,

Vicaire Général,

*Corisipiti, die 14 Februarii 1896.*

Brest. — Imprimerie rue Traverse, 18.